

# Ar Saozon en Tranzvaal

Gant Ch. ROLLAND a Werliskin

War don : Pillaouer Lokeffret ; (Foeï ! foeï ! foeï ! d'am zammic Aotrou !..)

## KENTA PENNAD

1

Breiziz ! ar Saozon 'zo brëvet !  
Dornet, evel dorna c'hoez ! (bis)  
Gant eur bobl vihan, ar Boëret ;  
Goassa pezh lamm ! peger braz mez !!<sup>(1)</sup>

*Diskan .*

Foeï ! foeï ! foeï ! d'ar Saoz milliget !  
Arao ! warn'han, da viken !  
Dao ! dao ! dao ! d'al laer iffrontet !  
Ra vezo torret he benn ! !

2

En Tranzvaal 'zeus madou eston,  
Miniou aour a diaman ? (bis)  
Mad eur pennadic d'ar Saozon  
Da derri ho naon ag ho c'hoant !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

3

Kasset 'so 'vit o c'hemëret,  
Eun arme vraz a pouner ! (bis)  
Dre ma c'hêrûont 'veint brëvet,  
Lardet a drastet gant ar Boër ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

4

Gwechall pa deûe paotret Saoz,  
Da fuketal er vro-ma, (bis)  
Evel ar Boëret hom zud-koz,  
A raë deze krak memeus tra ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

5

Dugesklin ker goass a Joubert,  
O dorne en peb tachen ! (bis)  
'Lake ker tom all war ho lerr !  
'Rôe dê lammou chouk-a-benn ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

6

Vel hirie ivez en Tranzvaal,  
Hom gwenn-dud deus ho hini, (bis)  
O lake brao bras da frinkal !  
Rôe dê ker braz troatad-fri ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

7

Eun drôat, trëgont deus trëgont,  
Tâl Gwenet war ann dachen, (bis)  
Ar Saozon gavaez klenk ho c'hont,  
Torret 'oa deze oll ho venn ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

8

Ia ! bep wech m'heint bet er vro-ma  
E vijent kasset a vern, (bis)  
Gant Breiziz brao braz da stoupa !  
Da foar ar foeltr ! kik ag eskern ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

9

Aboe kaer neus ar bed koza,  
Ann dud 'chanchont tamm ebet, (bis)  
Ar Saozon vel ho zud kenta  
A zo aillonet braz bepret ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

10

Met kavet deus are ho faer !  
Eun harp d'ho venn evit mad (!) (bis)  
Kalon oll boblou ann douar,  
A drid gant ar joa ag ar staad ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

11

Rak neus ket eur bobl war ar bed  
A gement 'c'hopp ket malloz ! (bis)  
Hirie war eur seurt lankonet,  
War Chamberlain ! laer braz Bro-Saoz ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc.

12

Na pebeuz strakadec daouarn !  
Pa glëver ve trec'h ar Boër : (bis)  
Bro-Saoz a yud he diou-skouarn !  
Gant ar spont, ann nec'h ag ar flër ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

13

Allo ! dalc'h-ta, Boër kalonec !  
Ro bec'h d'ar Saozon treitour ! (bis)  
Diven atao da groog c'hoantec,  
Deus ma vo kont te p'o zikour ! (?)  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

14

Ma vijen distag, me skampche  
D'ann tan 'vit souten da gaoz : (bis)  
Me varvche êvruz ! ô Doue !  
O sikour diswynta Bro-Saoz ! !  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

15

Breiziz ! kanomp a nerz kalon :  
Ra vezo torret ho venn ! (bis)  
Da virviken d'ar c'hoss Saozon,  
Dre ar bed oll ! en peb tachen ! ! !<sup>(2)</sup>  
Foeï ! foeï ! foeï ! etc...

(1) J'opte pour 8 pieds dans le dernier vers pour accentuer la roulade finale.

(2) Cette partie est spécialement réservée pour le chant.

1119

# EIL PENNAT

1

Ar Boëret, tud wenn evelt 'homp,  
O deus kwitaad ho bro goz,  
Ag aed d'ann Afrik pell duhont,  
Laëc'h 'm'aïnt brema war hent Bro-Saoz !

2

Ar vro gaer gret eno gante,  
Dre forz poania deïz a noz,  
Ve ket gant he danvez hirie,  
Gwell fall deus kanfartet Bro-Saoz !

3

Dent ar Saoz zo 'tao hir iskis,  
He grabanou stumet mad !  
Da beillet Boëret pe Breïziz  
A d'o laket d'indan he droad !

4

Vel gwech-all goz, an Irlantel,  
Hom c'henvreudeur er bed-ma,  
Zo aed a dû gant ar Boëret  
Vel gant hom re krak memeus tra !

5

Ar rumou tu'oa zioul neuze  
Eo ar re 'glask pëoc'h bepret ;  
'Neus met ar Saozon didalve  
Penn-kaoz d'ann drubuill war ar bed !

6

Pebeuz dizmeganz ! d'ar Saozon  
Kredout taga ar Boër kaez !  
Dirak ar bed vel tud poëltrou  
Hepken evit dont d'e laërez !

7

Gwassa tarz ! war ho Rouanez,  
Gwelet en fin he deyou,  
Drailla berniou er Gristenez !  
Gant malloz-rü ann oll broyou !!

8

N'hon penoz hell kousket ker mik (!) (??)  
Gant ann Urop o krôzal !  
Ag o klëvet bars en Afrik  
Boulïji *dum-dum* o yudal !! (1)

9

Saozon treïtour, da virviken,  
C'hwi vo kazet er bed-ma !  
O c'hoantaad dre nerz dont a benn  
Deus traou a madou ho nessa :

10

Jibraltar 'zo d'ar Spagnolet !  
Maltr d'ar Grëss ! Jerzey d'ar Franz !  
Da beb rüm eun tamm 'peud laëret !  
C'hwi zo gwell frank ho kousianz !!

11

M'ar fell deoc'h kavet peoc'h paduz,  
Gloar ag enor war ar bed  
E renkfoe'h renta, tud c'hoantuz,  
Pep tra d'ann hini eo glëet !

12

Bismark a n'eo krenv deoc'h laret  
Vije plantet ho praster !  
Ho nerz, ho c'hourgouill diskaret  
En traon ann Afrik gant ar Boër ! (?)

13

Pa vër er bazen hùella  
Kenta tra 'rër ëo diskenn,  
N'hep ac'hane 'renk distrëgada  
A raa eur gweli lamm chouk-a-benn !!

14

Eun den bihan pa renk koëa  
Na ve kamet gwell c'hlazet,  
Eul losk-braz pa renk disprada (!)  
'Dap tarchennadou braz meurbet !!

15

Pa ve lardet eul lanchore !  
Gant disterroc'h evitan,  
Bihan a braz a glask goude  
Ober oll memeus tra dezan !?!

16

Pa vo ar Saozon peur bladet,  
(Rak barnet sklaer heïnt da goll),  
A veffont d'ho zro egazet !  
Flastret a mac'het gant ann oll !

17

Ann oll boblou kaez hùalet  
Gante adreuz ar bed oll,  
A dorro ar chadenn galet  
Ag a yelo diwar ho roll !

18

Neuze poblou fur ann douar  
Raïo de chom war ho c'hlud (!)  
Vit harz ar brezellou dispar  
Ma reno ar peoc'h 'loez ann dud.

19

Pep rüm hello kerzet neuze,  
War lerc'h pâl ann ëvrustet,  
Merket deze gant dorn Doue,  
Ma veomp oll breudeur war ar bed !!

*Lardet a veïnt bemde-bemde !  
Kolezbert a Kolenzo !  
Dec'h divëza Spion-Kodje  
Bepret heïnt koll ! bravo ! bravo !!*

(1) Boulet spontuz a c'haa en c'hik ann den war greski, ma na heller e zenna goude : ann den tiset a renk perissa ganti.